





Les crêpes  
Ar c'hampouezh



Ur grampouezhenn gant sukr en deus graet al lapin.



« Piv en do ur grampouezhenn gant sukr e-barzh? » a c'houleñn al lapin.



« Me'm bo ur grampouezhenn gant... ur gelienenn e-barzh » a lavar ar ran.



« Me'm bo ur grampouezhenn gant... ul logodenn e-barzh » a lavar ar c'hazh.



« Me'm bo ur grampouezhenn gant... geot e-barzh » a lavar an dañvad.



« Me'm bo ur grampouezhenn gant...  
bananez e-barzh» a lavar ar marmouz.



« Me'm bo ur grampouezhenn gant... ur  
vuzhugenn e-barzh» a lavar al labous.



« Me'm bo ur grampouezhenn gant... ul  
lapin e-barzh» a lavar al louarn.

